

Nov. Dec. 1909

79 bis

— 183 —

## Nouel en honor d'ar Guinivelez euz hor Salver Jesus <sup>(1)</sup>

1

O christenien tut heürus,  
Gânet eo ar mabiq Jesus,  
Gant eür Verches ar parfetta  
A oue biscoaz oüar ar bet-ma.  
Canomp dezan gand an Ilis  
Ar Gloria in excelsis.

2

Nos Nedelec da hanter-nos  
Pa edo pep tra e répos  
Oüé gânet ar mabiq bihan  
D'hon tenna oll emeus a poan.  
Canomp oll en honor deza  
Alleluya, alleluya.

3

Er guèr à Vethleem eo ganet,  
En eür craoüiq dister mœurbet,  
Roüe an één hac an doüar,  
Paouroc'h euit ar paour Lasar.  
Canomp oll Deo gratias,  
Pa zeo ganet ar Messias.

4

Ma na gredit, deut da velet ;  
Eno er cheffet astennet,  
Etre un eügen, hac un asen,  
Oüar un neübeüdiq eus a foëen.  
Verbum caro factum est  
De Virgine Maria.

5

Demp oll d'adori ar Mabiq  
Hegarat eucl un oâniq.

---

(1) Ce Noël, que l'on croit utile de reproduire tel quel, est extrait d'un manuscrit de la Bibliothèque de la Marine, à Brest. Le manuscrit doit remonter au moins à la première moitié du XVIII<sup>e</sup> siècle. Il comprend des prières, des cantiques et des gwerz, le tout recueilli par M. du Botmeur, oncle maternel de Mgr de la Marche, dernier évêque de Léon.

Heuilliomp buhan ar pastoret  
A zo arozomp o vonet.  
Verbum caro etc...

6

En em stringomp oll d'an daoulin,  
Dirag é vajeuste divin,  
D'he hanaout euit hor roué,  
D'he adori evit hon Doué.  
Verbum caro etc...

7

Greomp dezan oll pep a present,  
Caezroch euit aoür nac archant,  
Eur galon carquet a regret  
D'e veza biscoaz offancet.  
Verbum caro etc...

8

Promettomp gand ar bloas néuez  
E chenchimp pelloch a vuhez,  
E renoncimp da pep pechet,  
Gant graç ar mabiq benniguet ;  
Verbum caro etc...

9

E rentimp oll er bloas néuez  
Carantez euit carantez  
D'ar mabiq en deüs hor prenet  
Dré ar goât en deueüs scuillet.  
Verbum caro etc...

10

Euit d'ar fin, pa vezo réét  
Meruel ha dilaisel ar bet,  
Ma pardono da Querneuis,  
Ha dreist pep réé da Botmeüris.  
Verbum caro etc...

---